

198

Gwers ar Gwign.

(f. 11)

Sellaouit oll bretonnet klevit eun exempl eruet.
Breman e zeus eun neubeudik amser
Gan eun den iaouank demezet.

Pa voa e vonnet da fedi an dud da assista en he euret
Tremen a eure dre an hend bras
Eun den krouget a renkontras.

A voa var an end exposet

Evid e grim ag e dorfet. (1)

An den man, evel mar goelas,

En eur wela e lavaras :

— Petra e kement man ma c'hamarat

Goec'h all ni a zo bet en em garet

Me garche vichez ar c'henta

doc'h & assista en euret.

Eb e chonjal e droug e bet
E veach en deus cuntunuet.

Pa voa deud an deis ma voa an euret
Ag an dud deus an dol assemblet.
e harias ive an den krouget
Ag o lakas oll estonnet

En pen an doll e neum lakas
Kaly eus e vellet a simplas,
Med ma laras d'er Kompagnunes
No heus ket affer da epouvanta
Me ne vijen ket deuet amañ a nes ma oc'h bed doc'h va fedi. (2)
An tan dioutan a sinklas
Pere a sullias an abijou

(1). - Les deux vers ont été ainsi ajoutés dans l'intervalle qui séparait les 2 strophes.

(2). - Les 3 dernières lignes (= 4 vers) ont été ajoutées; depuis: Med ma laras...

bleo ar goarzet koeffou ar merc'het
 Eb na hellchont drubi naq eva
 An dud dar ger zo e neom tenet.

(f° 12)

An den nevez epouantet
 E velet ar seurt tra erruet
 Ma chonjas en noz e heuret
 Antronos quitat e briet.

En devoa aont na vije kemeret
 Gant ar justiq a furnisset
 Evel nan devoa ket diskleriet
 E voant bet a (1) daou kamaradet

Da c'houlou deiz e partias
 e lec'h ma karie Doue e gass.

Pel bras e bed e valle
 ag a bars goulou kondition.

Dar fin en eum kavas magnifiq
 Gant eun otron ag eun itron.

Lazet e voa enon da pourveer
 A memeus da den a haffer

Eus (2) spas deus a pem blaz varmugent
 En deus [ol]i lezet (3) e intanvez
 eb kousket ganti nemet eun nos
 dre chanq e neum kavas dougererz.

Eus (2) spas deus a pem blas varmugent
 en deus gret servich excellent
 eb ober pris na commanant
 an oll doc'h outan voa kontant.

(f° 13)

Beb bloas er pede an otron

(1). - Le ms. porte : a ; lire : o .

(2). - Le ms. a : eus ; lire : eus , ou : en .

(3). - Le ms. a bien : i lezet ; je supplée d (de : dilezet) peut-être à tort .

200

D'ober pris gantan a hajou
 Ag e respontê dezhan humblamant
 e neur zont de trugarekat :

Serten me ne meus affer netra
 nemet eb ken o grasso mad .

An den man nevoa eun ure
 Dre kousk an noz en e wele

Deus e tad ag e vam ag e briet
 — Siwas me a kred int maro
 Red e din mond d'ar ger da velet .

Antronos mintin pa savas,
 Digant e vest a houlenas

E gonje ma voa e vadelezh
 A kerkoulz digant e vestiezh

Ma lakas tud an ti klaharet
 Dezhan ag en tristidigezh .

— Ma mignon bras , kent om quitat
 Poas bara dem c'hoaz eur forgnat .

Gra eur gwign en feçon ma out kustum
 A digas i din da blada .

Ag ounez a dalc'him em armel .
 Ken a kommanso loueda .

Bed (1) blas e nombre an otrou
 Pez a c'honerje a c'hajou .

(f. 14)

Ag oc'h e veza eun den onest
 Gant aont veza gant Doue blamet

A lakas er gwign se en aour melen
 E oll blavechou ed a ed .

(1). - Hds.: Bed ; lire : Bep .

Pa voa deud ar poënt da Kimiada
E vestri a c'houlernas digantan
Pegement a dlee dezan.

Ag a respontas dezan humblamant
En eur dont de trugarekat

Sertèn ne meus affer netra
Nemet eb ken ho grassou mad.

An otrou en eus komandet
Rei dezan en eur serviet

Gwin a bara da neum sebeilla
Evel na kemerche netra.

Ag eur pes daou skoet en he hodel
Pa voant e neum vriata.

Tri dra meus did da komandi
Rag se ne vank ket da hober.
Servichout a rai did va mignon,
Hoëlet a ri gant an amzer.

(f. 15)

Va drompill chaise a roan did
Ma c'hoarfe did klevet neb brud
He skoï eun tri pe pever tol trompill
e pelaiio diout an danjer.

Va c'hwign e roan did a prezant
Ne vank ket de c'hass dar ger.

En kenta plass ma heani
Hoël ag ar ieod a vo savet
Sign ar groas a lakai en ta kerc'hen
Ag en anon doue e neum armi.

En kenta plas ma heanas
Goude kemeret e repas.
Ma savas evid mond adare
Eb e sellas tam var e dr.

202

E gwign e ankonaç'has er plas se
Ag en ed dija eun antor leo.

Var e quis e bed retornet
Dre eur chans e deus i kavet.

Eun devez all e vond dre eur choat
arrog dezan e klevas en (1) gri.
ma skoas tri pe pever toll trompill
en eus (2) instant e deuas da sessi.

Souden daou zen a rankontias
Leun a c'hoad a deplorabl bras.
Ma houlenmas petra voa ar malheur
Diskleria rejont dezan.

(f° 16)

— Allas otrou ni a zo maltraitet
A laeret gant ar vallerien.
Ni a hal sur triugarekat
An eb zo bed e trompillat
Rag pa devoa klevet trous an trompill
E devoa kommanset an dud véchant
Da lama diganem ar bue
Goude kemeret on (3) arc'hant. —
Gand truez goelet o anken
E roas dezgo an alluzen.
En eur lavarot outan e hunan
Daou tra zo dija ermet
Peur benoug e harvuo an drede,
Doue d'am preservo pepred.
En he barez pa harvas
En eun ostaliri a diskenas.
Ma houlenmas outo da leina
Memeus oc'h toll ar quegin
evid interoji an histor
Deus komançamant pete ar fin. (4)

Klevez[] a re as tillikat

(f° 17)

(1). - Ms.: en ; lire: eur. (2). - Ms.: eus ; lire: eun.
(3). - L'o (de on) est écrit en surch. sur un a.
(4). - Dans cette page 16 du ms., aucune séparation par strophes n'existe.

E voa maro e mam ag e dat
E briet e voa iac'h magnifiq
E[b] parlant deus e mab beleg.

Mar karje er ger beza chomet
In ne devoa bed tam klasket.

E briet en devoa eur mab
Ag a voa gati desket mat.

Pa voa deud en oad de kass dar studi
Memeus evid beza beleg.
I a leke kundui e ziegerz.
Deus e mab en devoa ar sousi
Kemeret a re evid labour,
Mevl a plac'h a voa gati.

En instant man deveus leinet
Ag e ze dija raportet,
E ia da goelet e briet
Allaz hi ne anaie ket,
ag evid beza enon diverzat
E c'houlenas beza lojet.

e briet a respontas neuze
Neket bras ar c'homodite.
Evel ma zeo otrou mar souhetit
Chomet ag e veoc'h lojet.
Me karje e vije bras ma fouvoar
Evid galout o diquemeret.

(f. 18)

In e aidas a c'halon vad
Da kemeret digantan ar pakad.
Gragi a raz digantan ar pakad
evid e lakad en e frez.
in a iaz da dall an tan da toman
Karget a laouenedigerz.

Pa entreas en ti e mab beleg
E ias trist ag e voa estonnet.
An droug speret a deuas de tenti

204

Da lakad chonch fal deus he briet,
E chonjal e voa den fal ar belek
A deus enon de darempret.

Sortial a re e ber amzer,
A dost enon voa eur c'hoël
en nan doue va mignon marichal
Gra dime eur chontel emerzan.
A varc'hoas pa mo gred arhant,
Me rai ar voien da pea.

Koania rejont assemblez,
Ag en eur memeus kompagnuniez,
Eb ma hallvaz e mam ar belek,
Na ken neubeut e vam ar mab
Ma neum resolvas de larza
An noz se an den miserabl.

En instant mo devoa koaniet
E has de gamb gant ar beleg
Enon memeus e voa daou vele
En e voa lakad e hunan.
Ar beleg a kouskas buhanik
Ag en ne re hed re vuan.

(f° 19)

Ma sentas kousket ar belek
Deus e goële e diskenet
Ag in da kichen goële ar belek
Ar gontel en e zorn gantan.
Ten an dillad divar e feutrin
En esper gati e larza.

Inspiret gant Doue e chonjas
C'hober da genta sin ar groas. (1)

Ar belek a losk teir kriaden
e neur lavarad var boëz e ben:
fors e man va zad eus va larza
Va maemik paour deud d'am difen.

E vam, ar mevel, ag ar plac'h

(1). - Ces deux vers sont ajoutés dans l'intervalle entre les deux strophes.

Gant klac'har a pignas dan ei'h
gant ar goulo ag en eur voela,
Ma digor var e mab belek :

(f° 20)

Allas emezi me a vel dre o c'hure
Penoz e maro ma vriet.
E mab ar belek a savas
De gonzoli e nem lakas

Va mam komeromp patientet
Lekomp om fichans en Doue.
Mar de maro va zad ni a pedo
Jesus da reço e hene.

An histor evel ma klevas
deus e vele a diskenas
Ag e neum strinkas war e zaoulin
Da c'houlen pardon deus e val
Ag ive deus e briet
me a zo eun den miserabl.

Ag everze el lec'h pardon
On gleour deus a permission.

Setu me exposet dirazzo'h
greed o tever evel ma e glead.
Kontant bras on da souffr ar maro
Just e pa e meus meritet.

A pebez joa a kontantamant
E voa er gamb en eun instant.
Pa en eum anavechont evid bri[e]chou,
Ag ar beleg evid o mab.
E deuchont o tri da neum briata
Gant eur garantez admirabl.

(f° 21)

Antronoz pa voant e leina
En o p[er]ijadur ag e joa
E c'houlenas digant e briet ar pakat
Evid kaout ar c'hwign da troha.
Kant Louis aour voa kouet anezi

206

eb ma vouie voa netra eni .

Dar sul varle[?]c'h e hofferenas
O mab gant magnificans vras :

Grass dem da veza partisipant
Partout en e oll sakrifissou .
Grass dem da neum velet en barados
Da veuli Jesus er joaiou .

7

Janneton ar Charlez, neerez eurz a Taole .
10 fev : 1851 .